

Kent ar gomunion :

*Ar beleg : Setu Oan Doue, setu an hini a lam pec'hed ar bed :
Eürus ar re a zo galvet da bred santel an Oan.*

**R/ : Man Doue, ned on ket dign ma tait davedon,
met lârit ur ger hepken hag e vo aesaet din.**

Komunion :

Gloar, ô man Doue, d'ho karantez tener !
A lein an neañv, C'hwi a zo diskennet.
E gwirionez, amañ, àr an aoter,
Emañ geneomp Jezuz, Salver ar bed.

'Veit hor sekour, ha bout hor c'hoñfortañs,
En tabernakl e venn chom noz ha deiz,
Diskouomp dezhañ hor resped, hon doujañs,
Diskouomp dezhañ dreist-holl hor c'harantez.
Eñ a ra deomp, 'veit magiñ hon eneañv,
E gorf sakret hag e wad presius :
'Veit e resev, bevomp santel ha glan ;
En neañv, getañ, un deiz, ni 'vo eürus.

'Veit kloziñ an oberenn :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

*Ar beleg : Doue hollgelloudek d'ho pennigiñ :
An Tad, ar Mab hag ar Spered Santel.*

R/ : Amen !

Ar beleg : Kerzhit e peoc'h hor Salver :

R/ : Bennozh da Zoue !

Kan-dibenn :

Un Ael a-berzh an Aotrou Doue,
Da Vari a lâras un deiz :
Mari, Doue en deus ho choazet
'Veit bout Mamm da Salver ar bed.

Kentezh, hervez komzoù an Ael,
Dre galloud ar Spered Santel,
Mab-Doue a zo bet koñsevet,
E-mesk an dud en deus bevet.

Ar Werc'hez a respont neuze :
Setu matezh an Aotrou Doue !
Ra vo graet din, Ael benniget,
Hervez ar pezh hoc'h eus lâret.

Santez Mari, gwir Vamm da Zoue
Goulennit 'veit ho pugale
Meritiñ bout geneoc'h eürus,
E baradoz ho Mab Jezuz !



Redeleg : Pleuwigner : Overenn da 5e d'enderv ar 24 a viz Kerzu.

Un abadenn a vo kinniget adalek 3e d'enderv a-benn dizoloiñ
gwerelloù an iliz, ur banne e porzh ar Person (sal ar barrez)
e-tal an iliz àr-lerc'h, amzer da c'hortoz eur an overenn.

Pondi : d'ar 24 a viz Kerzu, da 5e d'enderv (er Penniliz)

Plañvour : d'ar 24 a viz Kerzu, da 5e d'enderv (e chapel Lomener)

An Orient : d'ar 24 a viz Kerzu, da 5e30 d'enderv (iliz St Loeiz)

Parrez KerAnna

1^{er} Sul an Azevent / 3 a viz Kerzu 2023

Kan digor : Mesi, dait hep dale 'eit salviñ tud kablus,

Diskennit ag an neañv, Salver karantezus !

1 Sellit a lein an neañv hon anken ha glac'har,

Klevit a lein an neañv hirvoudoù holl an douar !

2 'Vel deñved fariet, ne ouiemp 'menn ec'h aemp ;

Kollet hor boa an hent, pell doc'h Doue e vevemp.

3 Ne heuliemp, allaz, nameit hor fallantez ;

Kuzhet e oa doc'homp sklaerder ar wirionez.

4 Na pezh un teñvalded hor gronne a bep tu !

Goloet e oa ar bed avel get un noz du.

5 Àr-lerc'h un noz ken hir, pegourz e teuy an deiz ?

Ha pegourz e savo sterenn ar roue nevez ?

6 Digorit, digorit, ô palez kaer hon Doue,

Ha laoskit da ziskenn hor Salver ag an neañv !

Salud d'ar bobl :

*Ar beleg : Gras hor Salver Jezuz-Krist, karantez Doue an Tad
hag unaniezh ar Spered Santel, ra vint geneoc'h-holl :*

Respont : Ha get ho spered !

Confiteor : Me anzav dirak Doue hollgelloudek ha dirazoc'h, ma breuder,
am eus pec'het bras dre soñj, dre gomz, dre ober ha dre vank a ober :
dre man gwall, dre man gwall, dre man brasañ gwall.

Rak-se e c'houlennan get an Intron Vari bepred gwerc'hez, get an Aeled
ha get an holl Sent, ha geneoc'h-c'hwi, ma breuder, pediñ Doue aveidon.

Kyrie : Aotrou Doue/Krist, ho pet truez.

Lennadenn getañ : Lennadenn tennet a levr Izaia

*C'hwi, Aotrou Doue a zo Tad deomp ; hor Salver eo hoc'h anv a holl viskoazh.
Perak, O Aotrou, hol lezet da vonet ha da zonet pell ag ho hentoù, perak e lezit hor
c'halonoù da vout kaletet ha da chom hep doujañs deoc'h ? Deuit en-dro
abalamour d'o serviterion ha da rummadoù ho pobl. A ! ma tigorahoc'h an neañv !
Ma karahec'h diskenn ha lakaat ar manezioù da deuziñ 'vel koar diragoc'h !*

*Skouarn ebet n'he deus biskoazh klevet, lagad ebet n'en deus biskoazh gwelet un
Doue arall ec'h ober kement evit an dud a lak o fiziañs ennañ. Donet a rit davet an
dud a vez reizh o buhez, ar re a vir ar soñj ac'hanoc'h hag a heuli ho lezennou. Mes,
setu ma oc'h aet e kounnar abalamour m'hor boa pec'het a-enep deoc'h, abalamour
ma oamp disuj abaoe pell amzer. Holl e oamp daet da vout 'vel tud dic'hlan, hon
oberoù kaer 'vel lienaj lous ; holl e oamp gweñvet 'vel del kras kouezet ag ar gwez,*

hag hor falloberioù hor c'hase gete 'vel skubet get ur barrad avel. Den ebet ken é pediñ da stagiñ e galon doc'hoc'h en ur zihun.

Ha c'hwi ho poa kuzhet ho fas doc'homp, hol lezet chadennet doc'h pouez hor pec'hedoù. Ha koulskoude, Aotrou, c'hwi a zo Tad deomp ; ni 'zo ar pri, ha c'hwi 'zo ar podour : Ni holl a zo labour ho taouarn.

*Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !***

Psalm 79 : Aotrou, hon Doue, troit-ni davedoc'h;

Diskouezit ho fas hag e vimp salvet !

Pastor Izrael taolit pled da selaou,
c'hwi hag a ren bugale Jozev 'vel un tropellad deñved.
C'hwi azezet àr ar Geroubed,
dihunit en ho kalloudegezh.

Doue ar galloudoù, distroit,
a lein an neañv sellit ha gwelit ar winienn-se.
Hag he diwallit, hi hag a oa bet plantet get ho torn dehou,
ar mab hoc'h eus kennerzhed evidoc'h.

Ra vo aze ho torn da skoazelliñ den ho prec'h dehou,
ar mab hoc'h eus kennerzhed evidoc'h.
Ne faot ket ken deomp pellaat doc'hoc'h da virviken,
roit deomp buhez en-dro hag e kanmeulimp hoc'h anv.

Cil lennadenn : *Lennadenn tennet a lizher an Abostol Paol d'ar Gorintiz.*

Ma breuder, deoc'h gras ha peoc'h a-berzh Doue hon Tad hag a-berzh an Aotrou Jezuz Krist. Trugarekaat a ran Doue hep ehan abalamour deoc'h evit gras Doue a zo bet roet deoc'h er C'hrist Jezuz. Rak pinvidikaet oc'h bet ennañ e pep tra, e pep komz hag e pep gouiziegezh 'vel mad eo bet sonnaet en ho-mesk an testoni roet get Jezuz Krist hag 'vel ma ne vank gras ebet deoc'h-c'hwi, c'hwi hag a zo é c'hortoz diskuiliadur an Aotrou Krist. Rak fidel eo Doue, eñ hag en deus ho kalvet da vevañ en unaniezh get e vab Jezuz Krist an Aotrou.

*Setu komz an Aotrou Doue : **Bennozh da Zoue !***

Allelouia : Ar beleg : *An Aotrou Doue geneoc'h* : **Ha get ho spered.**

Ar beleg : *Lennadenn ag an Aviel santel hervez St Mark.*

Ar bobl : **Gloar deoc'h-Chwi, ô Aotrou Krist !**

Abiel : *En amzer-hont, Jezuz a gomze get e zisipled ag e zistro : «Diwallit, bezit àr evezh, rak ne ouit ket pegoulz e vo. Hañval eo doc'h un den aet da bell vro ; kuitaet en deus e di ha lezet pep tra etre daouarn e serviterion, roet e labour da bep unan, ha lâret d'ar porzhier bout àr evezh. Bedit àr evezh enta, c'hwi ivez, rak ne ouit ket da be kours e tistroay mestr an ti, hag e vo d'enderv, pe da greiznoz, pe da vintin pa gano ar c'hog, pe da gendahoue. Bedit àr evezh get an aon ma tegouezhahe a-greiz-tout ha ma ho kavahe kousket. Ar pezh a lâran deoc'h, ha d'an holl el lâran : Bedit àr evezh !*

En dibenn : ar beleg : *Setu Komz an Aotrou* : Meuleudi deoc'h, ô Aotrou Krist !

Kredo : **Me 'gred e Doue, an Tad hollgelloudek,** Kroueour an neañv hag an douar, hag e Jezuz-Krist, e Vab unganet, hon Aotrou, a zo bet koñsevet dre nerzh ar Spered Santel, ganet ag ar Werc'hez Vari, en deus gouzañvet dindan Poñs Pilat, a zo bet staget doc'h ar groaz, marvet ha bet lakaet er bez, diskennet d'an ifernioù, daet a varv da vev an drivet deiz, pignet d'an neañv, hag azezet en tu dehoù an Tad, a-eno e tay da varn ar re vev hag ar re varv.

Me 'gred er Spered Santel, en Iliz santel katolik, e kumunded ar Sent, e pardon ar pec'hedoù, e adsav ar re varv, er vuhez peurbadus. Amen !

Pedenn hollbedel : **Klevit a lein an neañv pedennoù holl an douar !**

Lid ar profoù : *ar beleg : Pedit, mam breuder, ma plijo get Doue an Tad hollgelloudek degemer ma sakrifis a zo ivez ho hani-c'hwi :*

R/ : Plijet get Doue en degemer ag ho taouarn, aveit e c'hloar hag e veuleudi, aveit hor mad-ni hag hani an Iliz.

Prefas :

Ar beleg : An Aotrou Doue geneoc'h :

R/ : Ha get ho spered !

Ar beleg : Hor c'halon d'an uhel :

R/ : Emañ troet trema Doue !

Ar beleg : Trugarekaomp hon Aotrou Doue :

R/ : Just ha santel eo !

Santel : **Santel ! Santel ! Santel ! An Aotrou Doue, Mestr ar bed !**

Lan eo get ho kloar an neañv hag an douar : **Hosanna e lein an ne !**

Benniget an hani az a e anv Doue : **Hosanna e lein an ne !**

Gorreoù : **Ra vo meulet !**

Hon Tad : hag a zo en neañv, hoc'h anv ra vo santelaet,
Ho rouantelezh degaset deomp,
Ho vennantez ra vo graet àr an douar 'vel an neañv.
Roit deomp hiriv hor bara pemdeziek,
Pardonit deomp hor pec'hedoù,
'vel ma pardonomp d'ar re o deus pec'hed doc'homp,
Ha n'hon laosket ket da gouezh en tantasion
Met hon diwallit doc'h an droug.

Ar beleg : Plijet geneoc'h, Aotrou Doue,... ha distro hor Salver Jezuz-Krist :

R/ : Rak deoc'h-C'hwi, Aotrou Doue, emañ ar Rouantelezh, ar gelloud hag ar gloar a-holl-viskoazh da virviken. Amen.

Lid ar peoc'h :

Ar beleg : Salver Jezuz-Krist... a-holl-viskoazh da virviken.

Peoc'h hor Salver a vo bepred geneoc'h.

R/ : Ha get ho spered !

Oan Doue :

Oan Doue a lam pec'hedoù ar bed : **ho pet truez doc'homp ! (bis)**

Roit deomp ar peoc'h !